



CANTIC SPIRITUEL

VOAR AR JUGEAMANT.

Songeomp e rancomp un derves
 Renta ur gont eus hor buhes :
 Songeomp ha meditomp ato ,
 Petra om bezo goude ar maro.

Er valañç e vezo poëzet
 Ar mat hac an drouc commettet ,
 Quement en deus gret ar galon
 Gant an usaich eus a ræson.

Beza e vezo examinet ,
 Hep lesel netra tout cuzet
 Ar plegou eus ar goustianç
 A zisplego en e bresañç.

Gant ur goulaouen eternal
 E teuer bete ar griminel ,
 Bete ar justa a vezo clasquet
 Gant ur c'houlaouen allumet.

C'hui apparez en ho puez,
 Casi leun a santeles,
 Mæs oc'h oll bec'hegeou masquet
 A vezo neuse condaounet.

Al leor a vezo digoret,
 Ar feuillennou examineta,
 Pa na ouffac'h quet lenn er bet-mâ,
 Nemet re ne lennot ennâ.

Ne deus pec'her er bet quen ignorant
 Na vezo neuse re savant,
 Gouzout het un eternite
 En devezo collet un Doue.

Hep gallout caout e nep façon
 Pelloc'h a gonsolation,
 N'eus nicun hac er soulache
 Fachet en oll ous e ene.

El leor quenta eo rapportet
 Quement tra en devezus songet,
 Control da brofit hon nessa,
 D'en em vengi eus aneza.

Quement em devezo ive,
 Songet control d'ar burete;
 Quement a so criminela
 A so rapportet oll enna.

En tu all e caffemp scrivet
 An actionou reprovvet,
 An oll laëronsiou mechant
 A vezo guelet scleramant.

Guelet a raï an orphelinet
 En deus er bet-ma ruinet,
 Lamet eus o dorn o bara,
 A ranquent da gaout da veva.

Quement en deus drouc-prezeguet
 A epouvanto e speret,
 O velet an detraction
 A so caos d'e zaounation.

Er plaç all e quaver marquet
 Ar goall exempl en deus roet,
 E c'hevyer hac e vlashemou,
 E gruaute, e vengeançou.

Choumet hep rei an alusen,
 Ha negliget an offeren;
 Na sarmon, nag instruction
 Na antree en e galon.

A songet en deus en e grimou,
 Frequantet ar sacramanchu,
 En deus profanet goat un Doue,
 Hennes er maleur d'e ene.

C'hui appares en ho puhus
 Casi leun eus a santeles ,
 Mæs oc'h oll pec'hejou masquet
 A vezo neuse condaounet.

Ur certen doctor a Baris ,
 Estimet leun a honestis ,
 Dre e vertus , speret hac e squiant ,
 Er c'hemeret den excellant.

Mæs ar vertus en assuranc ,
 Ne gonsist quet en apparanc ;
 Evidomp da droumpla ar bet ,
 Doue jamæs ne ves troumplet ,

An doctor-ma so decedet ,
 Gant enor eze conduet ,
 Eit ma vise enterret
 Ebars en douar biniguet.

Pa edeur o Cana an offiç
 E teu da barlant en ilis ,
 E sao e benn eus e arc'het ,
 Ha e lavar eo condeounet.

Antronos dar memes servich
 E comps adarre en ilis ,
 Penaos eo barnet e ene ,
 Sar e jugeamanchou Doue.

Ur vec'h al a larer memes
 E crias d'ar gompagnunes,
 Gant ur voves pitoyabl meurbet,
 Penaos, siouas eze daounet.

Quement a yoa eno presant,
 A oue troublet antieramant,
 Guelet un seurt den condaounet,
 A gredent oll a voa salvet.

Da zouar an anevalet,
 E oue casset hac enterret,
 Inéign da veza sebelliet
 Ebars en douar biniguet.

Disabuset nep a garo,
 Map Doue assur hor barno;
 Ret e vezo mont diraza
 Da gaout hor setanç diganta.

Pelec'h, mechant ha malheurus,
 A lavaro neuse JESUS,
 Ema quement ameus roët
 Da servichout dit voar ar bet?

Rentit cont din-me den milliguet;
 Eus ar goat ameus scuillet,
 Eus ar maro ameus souffret
 Da gaout pardon dit eus da bec'het?

Hac evelse ho condaonan
 Da vont evit biquen en tan ,
 Evit het un eternite
 Coll ar bresanç eus da Zoue.

Mil vallos d'an heur a bedan
 Ma zoun concevet er bed-man :
 Mallos d'an heur ma zoun ganet ,
 Ha da nep en deus ma maguet.

D'am zat ha d'am mam da guenta ,
 E pedan va mallos muia ,
 E deffot dont d'am instrui ,
 N'emeus desquet nemet pec'hi.

Caos int din da vont d'ar poaniou ,
 Siouas dre o goall exemplou ,
 Hac emeus-y bet imitet ,
 Evelse ezoun condaounet.

D'am c'honfessour ha d'am fasteur
 A so caos eus va malheur ,
 Va mallos a bedan bepret
 E faot n'odeus ma c'hellennet.

Quement so caos ma zoun daounet ,
 R'ha veziut biquen milliguet ,
 Dre arrach o vont en iffenn ,
 Evit losqui quit hac esquern.

Adeo Mari , adeo Guerc'hes ,
 Brema n'oc'heus mui a drues ;
 Sur ma visen bet deoc'h fidel ,
 Ne oan quet en tan eternal.

Ha me bet en em antollet
 E breuries ar chapelet ,
 En divige din servichet ,
 Ma visen en em acquitet.

Adeo oll sent ha santeset ,
 Va esperanç so passeet ;
 C'hui ho pezo contantamant ,
 Ha me , siouas , nemet tourmant.

Adeo J E S U S , pa se requis
 Dre un arret eus ho justiç ,
 Coll va lot eus ar barados ,
 Elec'h m'embise bet repos.

Ma ve din-me sur permetet
 Mont un nebeudic voar ar bet ,
 Me a raffe d'ar bec'herien ,
 Ur schol da ober pinigen.

Me a gomze quer pitoyabl ,
 Na ve nicun quer miserabl ,
 Na zillesse a grenn ar bet ,
 Ous va guelet ous va c'hlevet.

Emaoun o couesa en iffern ,
 Aman n'emeus den am espern ;
 Va zreina a ra an drouc speret ,
 Da vont da gaout an dragounet.

Mar deus christen na. christenes
 A estim e silvidigues ;
 O c'honjuran abers Doue ,
 Da laquat urs en o ene.

Consideromp ar jugeamant ,
 Ma ranquimp oll beza presant :
 Songeomp enna het hor buhes
 Ha ne bec'himp biquen jamæs.

F I N.